

Clec'h (Montroulez 1788 – Kastell-Paol 1872) : **Le glanneur celtomane.**
Modernnaet eo bet an doare-skriva.

Intañv al lochenn

I

Er bed-mañ nag aour nag arhant
N'o-deus biskoaz staget va halon ;
N'on nemed eur hêz peizant,
Evruz e oan em hondision ;
Mez ma fried karantezuz
Hirio a gollan, pebez anken !
Gwelet ha n'on ket malevruz,
C'hweh krouadur am-eus em lochenn.

II

D'ar houlz ma oa beo va fried,
E furnez a charme va halon ;
Va bugale, ouz va hared,
A roe din konsolasion.
Beb eil oll e poken deze,
Eun tad evrusoh ne vo biken,
Dre o jestou tener bemde'
E oan evruz e-barz em lochenn.

III

Da vintin, pa'z an d'ar parkou,
Adarre da gomañs va devez,
E lezan va bugaligou
Euz va zi da gemered evez ;
Ha da noz, pa deuan en-dro,
Evid va distrei euz va anken
En em stardont oll war va zro,
D'am hoñsoli e-barz va lochenn.

IV

Braz 'oa va laouenidigez
Pa vijen er gêr gand va ziad ?
Bremañ pa welan va merh kêz,
An dour a deu war va daoulagad ;
Seblantoud a ra din bepred
Gweled he mamm dener em hichenn,
En desped d'am heuz diremed,
'H on c'hoaz evruz e-barz va lochenn.

V

O ! ma hallfen hep kaoud mizer
Sevel ha deski va bugale !
Me a hallfe gand an amzer
Fortunia va merhig marteze ;

Neuze va faotred a vezo braz,
Barreg da labourad eun dachenn.
Em hozni me a hallo c'hoaz
Beza evruz e-barz em lochenn.

VI

Evrüz-meurbed me 'n em gavo
P'o gwelin o hounid o bara.
Neuze, pa deuiio ar maro
Euz ar vuhez-mañ d'am dilivra,
Va mignoned am enterro
Gand va fried pe en e gichenn,
Ha va bugale a ranno
Va zamm tiegez ha va lochenn.